


ar marh-du bihan



RUMMAD KENTA

1

COLLECTION "JE LIS TOUT SEUL"

O.C.D.L.

eun doare
da zeski lenn gand
J. TAYLOR ha T. INGLEBY

kempennet gand
E.PLOCKI

gouleñnou gand
E. PLOCKI

Skeudennou gand
D. CROWE

diwar « La petite locomotive rouge »
troet e brezoneg
gand bugale hag ar
BLEUN-BRUG

Yves Coïc


ar marh-du bihan



ISBN 2.7043.3065.4

© Longmans, Green & Co. Ltd. London

© 1972-1978 O.C.D.L. Paris, Printed in France




Setu amañ marh-du bihan
Yannig



gand e alhouez.




Yannig a gemer e varh-du bihan.
Sevel a ra e boueziou.
Lakaad a ra anezañ war al linenn.
« Kê, marh-du bihan »
eme Yannig.



E kounnar emañ ar marh-du bihan :
« Ne z'in ket war al linenn !
emezañ,
Ne z'in ket war al linenn.
Dindan an dôl ez in
paz war al linenn. »

Neuze ar marh-du bihan
a guita al linenn
hag ez a dindan an dôl.
Hag e tro... hag e tro...
Hag e chom a-zav.





Yannig a gemer
e varh-du bihan.
Sevel a ra e bouzeiou.
Lakaad a ra anezañ war al linenn
« Kê marh-du bihan,
war-raog a-hed al linenn. »
eme Yannig.

E kounnar emañ atao
ar marh-du bihan.
« Ne z'in ket war al linenn,
emezañ,
Ne z'in ket war al linenn,
Bet on bet dija dindan an dôl.
Bremañ ez in dindan ar gador,
Paz war al linenn. »






Neuze ar marh-du bihan,
a guita al linenn,
hag ez a dindan ar gador.
Hag e tro... hag e tro...
Hag e chom a-zav.




Yannig a gemer
e varh-du bihan.
Sevel a ra e boueziou.
Lakaad a ra anezañ war al linenn.
« Kê, marh-du bihan,
war-raog a-hed al linenn. »
eme Yannig.



E kounnar emañ atao
ar marh-du bihan.
« Ne z'in ket war al linenn,
emezañ.
Ne z'in ket war al linenn,
Bet on bet dija dindan an dôl.
Bet on bet dija dindan ar gador.
Bremañ ez in dindan ar skaoñ-berr
paz war al linenn. »


Neuze ar marh-du bihan
a guita al linenn,
hag ez a dindan ar skaoñ.
Hag e tro... hag e tro...
Hag e chom a-zav.



Yannig a gemer
e varh-du bihan.

« Mar plij, marh-du bihan,
kê war al linenn. »
emezañ.

Sevel a ra e boueziou.
Lakaad a ra anezañ war al linenn.



Ar marh-du bihan
n'eo mui e kounnar.
« Bet on bet dindan an dôl,
Bet on bet dindan ar gador,
emezañ,
Bet on bet dindan ar skaoñ-berr
Bremañ ez in war al linenn. »




Ha bremañ, ar marh-du bihan
a ya war al linenn
bep tro ma sao Yannig
e bouzeiou.

Hag e tro... hag e tro...
Ha Yannig a stlak e zaouarn.



Poent eo
mond da gousked.
Yannig a reñk ar marh-du bihan
'barz e voest, gand al linenn.
Lakaad a ra ar voest war ar stal.
Hag ez a da gousked.



« Noz vad, marh-du bihan
noz vad. »

eme Yannig.



Ar marh-du bihan

1. Pe ano e-neus ar paotr-bihan ?
2. gand petra e c'hoari ?
3. e peleh eo bet ar marh-du
bihan o pourmen ?
4. E fin an istor, perag e chom
ar marh-du bihan war al
linenn ?
5. gand petra e plij dit c'hoari,
er gêr ?

JE LIS TOUT SEUL